

# ENEBOUR BREIZ :-

WAR DON : *Sonnen ar chistr neué.*

*Andantino.*



Ma ze - len peur - vu - ia ken drant,



Ma trid gant an du - di, Ma trid gant an du - di,



A gan hi - rie gant ne - c'ha - mant, Eur zon a vel - ko - ni,



A gan hi rie gant ne - c'ha - mant, Eur zon a vel - ko - ni.

Ma zelen, peurvuia ken drant,  
Ma trid gant an dudi,  
A gan hirio, gant nec'hamant,  
Eur zòn a velkoni.

Eneb ar vezventi direiz,  
Ar si-ze ken mezus,  
A gresk bemdez en hon bro Breiz,  
'Vel eur c'hlenved spegus.

Kregi a ra er yaouankiz,  
Zoken er vugale;  
Dindanan gouenn goz ar Vreiziz  
A blado hepdale.

Poanius eo gwelet tud yaouank,  
Gloar ha buhez eur vro,  
O teul en evaj, 'vel er fank,  
Brud vat, feiz o zado.

Mar deo truezus buhegez  
Eur pôtr yaouank mevier,  
Mantrus eo buhez an tiegez  
Renet gant eul lonker,

Pried garo, tad didruez,  
Na gar 'met gwin-ardant;  
D'ezan, hep keuz, e werz bemdez -  
Ene, nerz ha skiant.

Koll a ra pep urz, pep kreden,  
Ankouaz hent an iliz;  
Bep sul e klev an oferen  
Ouz tôliou an hostiz.

E wreg kez hag e vugale  
O deus evit loden  
Dienez, klenved, paourent  
Ha dacerou a anken.

War zao eta, gwir Vretoned,  
War zao, en han' Doue!  
Ouz ar vezventi milliget,  
Stourmomp en pep doare!

Brezel d'ar gwin-ardant mezus,  
Enebour an Arvor,  
Ma vo hon galloud peurbadus  
Ha diflach hon enor!

FILOMENA CADORET (*Koulmig Arvor*).